

D. 6 bis

ME HOER JANED

Eid dansal A LARIDE

Diouallet, me hoér Janed, ha diouallet, mar karet,
Mar ho pé ur butunér, pé un "ivrogneur" benneg.

Mar ho pé ur butunér, 'n gaveèt ket hir hos amzér
Med mar ho pé un "ivrogn", e kaveèt ré hir.

Nag ur butunér em bo ké kleùet em às laret,
Ké en nihour devehan e oé bet de me gwéled.

Ké en nihour devehan e oé bet de me gwéled ;
De me zad ha de me mamm, e larér, 'n devoé komzet.

De me zad ha de me mamm, e larér, 'n devoé komzet.
Me oé mé merhig youank, ne ouiennetra erbed.

A laridondènig é a laridondéno (bis) A larilarilala a larilalèno(bis)

M'ho suppli merhed youank, merhed de zimizein,
Nann ne laket ket ho chonj ged paotred de dennein.

Nann ne laket ket ho chonj ged soudard youank erbed,
Me 'm ès laket me hani ha bremañ m'ès ké a se(d).

Ké ___ buhé ur soudard e zo un dra en arvar,
Ké hiriù éma biù hag arhoah éma marù.

A laridondènig é a lari.....

(Dastumet e Pondi, miz meurh 1969 ged
KERLEN PONDİ).

- Attention, ma soeur Jeanne,
si tu veux ; si tu as un fumeur ou un ivrogne quelconque. - ... un fumeur, tu ne trouveras pas long ton temps ; ... un ivrogne, tu trouveras trop long. - C'est un fumeur que j'aurai, car j'ai entendu dire que la dernière veille il est venu pour me voir. - A mon Père et à ma Mère, il a parlé, dit-on ;

J'étais petite fille, je ne savais rien. - Je vous supplie, filles à marier ; ne mettez pas votre idée avec les jeunes gens " à tirer". - ... avec un jeune soldat ; j'ai mis mon idée et maintenant j'en ai regret. - Car la vie d'un soldat est chose douteuse, car aujourd'hui il est vivant et demain il est mort.